

V. n° 12 or 5 (p. 200)



CANTIC SPIRITUEL

VAR BUEZ SANTEZ EODET,
G'inidic a Escopti Leon.

Var ton Guers THEOPHILUS.

CLEVIT oll, tud yaouanq a escopti Léon,
Clevit ur Vers nevez a doucho ho calon,
Compozet er bloa-ma en benor da Eodet,
Ur zantes a Leon, herves n'ia eo scrivet.

A gastel Tremasan, e pares Landunvez,
Galon, un dijentil eus ar c'haera lignez,
A zeuas da eureuji, evit qenta pried,
Merc'h ar Prinç eus a Vrest, Florança oa hanvet.

Bugale o devoe, mæs oll n'o hanvan qet:
Unan eo Sant Tang'y, un all Santez Eodet;
O daou pa gommanjont caout uzach a ræzon,
Gant o mam e oent desqet da ober oræzon.

Da bratica'r vertuz, chasseal ar pec'het,
Da dec'hel diouto evel dious serpantet;
Ar pez a zo necesser a rea ar vugale,
Evit, goude ar maro, mont da velet Doue!

Hog'en ar maro cris, dinatur hag ingrat,
A lamas digante o mam santel ha mat,
A roas dê, siouas, ul lesvam millig'et,
Carg'et eus a valiç ebars en o andret.

Ur bloas goude maro emeus a Florança,
Galon e Brosaos a c'has d'en em rentas,
Eno un demezel souden a eureujas,
Huel a galite hag eus a valiç bras.

E castel Tremasan ya oant en em rentet,
Dalc'h oa Sant Tang'y gant e oll c'hoarezet,
Zo er ar sam nevez gant lesvam lesbauvet,
A gemmanç d'o zreti evel un drouc-speret.

Nemet ar blasfemou ha mallosiou infam
No gîeo an daou vug'el a c'henou o lesvamç
Evel tortetourien ouспен hi o c'hanne,
Hep nep respet d'o zad p'ini e zamalle.

Sant Tang'y alafin o tont d'en em squiza,
Goude eis bloas bemde bet treet er c'his-ma,
Gant conje mat e dad a yas prest da Baris,
Evt ouz e lesvam evita ar maliç.

Cris vize ar galon na zeuje da ouela,
O velet Sant Tang'i o tont da g'imiada
Drous Santez Eodet e c'hoar muia caret,
O façou d'e o daou gant daelou goloet
Penaos, va breur Tang'y eme Santez Eodet,
E teuit d'am dilezel da veza boureviet;
Mas n'oufiemp pareat, aretomp hon daelou,
Guel e ve ma souffreu evit souffr hon daou.

Sant Tang'y o ouela ne alle get parlant,
Gant tuez ouz e c'hoar a gar partermant,
E galon gant glac'hat a zo qazi ranner
O clêvet ar c'homzeu eus e c'hoar Eodet.

Allas! Eodet breman cetu c'hou oc'h unanç
Rallat eot bemde dre gastel Tremasan
Cant an treid millig'et eus ar bleizez infam
Zo couet d'e c'h e partach elec'h ur gant lesvam.

Eodet goude beza eus he breur qimiadet,
A bromet da Zoue souffr gant patientet
Eus a heis he lesvam an oll insolansou,
O respennu hep claçq nep razoniu.

He lesvam er c'hontrol, a redouble a valiç,
Dis moyenou neves e zourmant e pep g'is.

O velet e qars vaqi d'an orezon,
 Evit dont d'e ampech, cetu aman ar rezon.
 Darn he demezelet ha servichezeze
 A gassas en ho hent evit ca ut ur sujet
 Da ober da Eodet labourat incessamant,
 Er c'hamprou er g'egin, hep dezi nep damant.
 Dirac he orator bars en he c'habinet,
 Oc'h ober orezon alies de caveat;
 Mes he lesvam mechant qement se pa santas,
 Orator cabinet, tout en o ranvettas
 Pa sonet er chapel ar c'hloch d'an oferen,
 Peini a gare da glévet pen da ben
 Labourat er g'egin ha g'erchar en ell dour,
 Neuze e oblige hep rei dezi veur.
 Ous he zad he lesvam biscoas ne oue disents
 Gant respet bras e ié qement a ordiments
 Pa ne alle en deis vaqi d'an orezon
 An darn brassa en nos e ié a vir galon.
 Gant avis he directeur e promet da Zoue
 Biviquen, emezi, pried ne devize
 E it galloud bemde sonjal er bassion,
 A oa sur, pa alle, e occupation.
 Gant he mam Florança e devoa bet disquet
 Donet da soulaji ar beorien ezomet
 Cals eus he repasiou goude a reserve
 Hag hep gout d'he lesvam deo metal er c'hette.
 Un devez dre goal chaach e rancontras Eodet
 O cas an aluzen d'ar beorien ezomet
 Hig eno var ar plas gant outrach e c'bannas
 Ha bara ar beorien gant he treid a flannas
 Goude e veza bresset d'ar chas prest en toises
 En despét da Eodet, da Zoue er c'hrouas.
 Ar Zantez patient hep la aiet ur g'e
 A return d'ar c'hassel da off. oïl d'hor Zalver.

Caer e devoa he lesvam dont d'e fersecuti,
 Na fallout qennebeut dont d'e aneanti,
 Ar brud eus he vertuz partout a oa scuillet,
 A denne an noblanç da zont oll d'e guelet.

O velet qement-se e arrach a gresqe,
 Pa velas an noblanç a g'enta qalite
 O tonet d'e reglasq evit e eureuji,
 Hag a bep avantach o tont d'e assuri.

Bete breman Eodet zo bet indifferant,
 Oll qement tra a zouffr a zouffr hep nep damant;
 Mes dont da eureuji biquen ne gonsante,
 Goude rei da Jesus he c'horf hag he ene.

Er fêçon-ma dezan ec'h adres e feden:
 Jesus, va guir bried, permetit ma varfen
 Qent evit birviquen terri ar bromessa
 P'ini ameus great deoc'h hag a ratifian.

Ar valiç he lesvam a zervichas dezi
 Da ampech ma rancse donet da eureuji,
 O velet ezedo en un estim qer bras,
 Prest pel dious ar c'hastel var ar meas e c'hassas.

Eno en un tiig hag en meurbet dister,
 Bemdez he orezon a offre d'hor Zalver,
 Ha cals a euvrou mat bemdez a exerce
 En andret pep unan na guella ma elle.

Cals a blac'het yaouanq a oa bars er c'hanton
 Dre e scol hag exempl touchet en o c'halon,
 A renonças a grenn da vaximou ar bed,
 En en roas da Zoue dre garante barfet.

Erfin he breur Tang'y a Baris distroet,
 E castel Tremasan prest eo en em rentet,
 Hag hep e anaout er zal oue cunduet,
 E pelêc'h ma yoa cals eus a zemezellet.

Ha pa oa gant an oll gant respet saludet,
 Souden e c'houlennas pelec'h edo Eodet,

Qer buan e lesvam en tennas a gostez,
E sonjal e c'hlasqe eyit ober al lez.

Neuze an traitourez a lavaras dezan :
Coves ar virionez ouzoc'h a zeziran ;
An demezel Eodet a zo ur plac'h collet
Zo ur prostituet a g'ement a gafet.

He obstination, he buez debordet
D'he c'has var ar meas e deus or c'hontraignet
E clasq, allas ! golo gant guel facilite,
Malheur un demezel demeus e c'halite.

O credi re vuan Tang'y a zortias,
Gant coler ar brassa e c'hoar a glasqas
E qichen ur feunteun e oalc'hi he dillat,
Evel ma er guelas en e galvas timat.

Eodet pa er c'hlêvas a gommanças tec'het,
Rac ma zoa ganti oll dianavezet,
Mæs én ous he fourcui neuze prest e zrapas,
Ha gant un tol cleze a grenn e dibennas.

Pa oa coueet d'an douar o velet he bruchet,
Carg'et a lèz-caoulet hep gouzout ar sujet,
Dious an amezeyen neuze en em informas
Eus a vuez Eodet, ar pez en estonas.

An dud oll glac'haret a lavaras dezan :
Bebet e deus Eodet assur bete breman
Gant pep seurt santelez exempl mad er c'hanton ;
Glac'har vras hon eus dei eus a greis hor c'halon.

He lesvam criis, allas ! e deveus hy chasseet
Eus a gastel he zad hag aman banisset
Gant pep seurt paourentez, al lèz oc'h eus guelet
Da zoulaji ar paour e cus oa destinet.

Pa en devoa Tang'y ar virionez clêvet,
E oue dare dezan mervel gant an despet
Gant qeus en e galon d'e beza dibennet,
O credi re vuan e esyam connaret.

D'ar c'hastel e tetras da gaout e dad Galon,
 En eur squilla daelou eus a greis e galon;
 Pa antress er zal e dad a rancontras.

Qer buan d'an daoutin dirazan en em stringas.

Eno e tisclerias, me eo ho mab Tang'y,
 A veris ar maro hep caout nep damant dia
 Allas! siouas allas! va c'hoar muya caret
 Gant un taol cleze ameus bet dibennet.

E ouela da Eodet pa oant eno o daou,
 Al lesvam oa e joa guelet oll e c'houous
 Souden e creis ar zal Eodet a antreas
 He fen da he daouarn eno ec'h apparissas.

Eno var he gouzoug he fen a apliqas,
 Hag evel diag'ent oue en em stagas;
 Qerqent eus he lesvam e tro publiquant,
 Hag evelen oue e c'ommanças parlant:

Pep tra oll er bed-ma en devez e amren
 Doue bete ur poent a zoufr gant ar pecher,
 He malic e devez souffret bete brema,
 Ema o prepari donet d'o punissa.

Adieu eta, lesvam dinstur hag ingrat,
 Deut eo an heur brema deomp d'en em guitatg
 Great eo ac'hanoc'h prest eo coler Doue
 Da guezra var ho pen pad an eternite.

Ur c'hren qen violant eno e e'homeras,
 He antaillou couezet gant he zreit a pressas
 Erfin gant e arrach d'ap douar en em stringas,
 Hag evel ma velot he buez a finissas

Aziouc'h ar c'hastel ar gurin o trouzal,
 A zevas da sponza qement a oa er zal,
 Qer buan o coueza e crevas an doen
 Hag hep ofanci den he losqas pen da ben
 Ar dad oll estonet a zevas da grenn,
 O velot un tresa eus a greis he joa

Ebars en un instant e ludu oc rentet,
Allas! hag he e e livret d'an diouc-aperet.

Incontinent l'odet ouz he breur a droas,
HagOUNTA publiqamant evelen a gomzas:
Pa em guelzoc'h, va breur men'oc'hanayen qe,
Ar pez a roas din guir sujet da dec'het.

Mæs cusul hon lesyam a oun erfat bréma
Eo bet deoc'h ar sujet da zont d'am dibenna,
Ha rac se ar Verchez meus pedet a galon
Da c'houlen evidoc'h digant Doue pardon.

Qer buan d'an daoulis Tar g'y en em stringas,
Ouz e c'hoar a galon pardon a c'houlennas;
Pardon, va c'hoar, pardon d'o peza massacret,
Va c'halon gant glac'har a zo qazi rannet.

He oll sacramanchou goude a recevas,
Hag ebars un instant adare e varvas;
Neuze gant an ælez d'an ên oc cunduet,
Endra pado Doue da veza curunet.

He c'hoif goude a oue enterret gant honor
E pares Landunvez peurdost da vord ar mora
Eno he deus great cals eus a viraclou,
Abca voa he ene er gloar eus an ênvou.

Perac oll tud yaouanq couls ha Santez Eodea,
Ne sentet ouz ho tud, renta dezo respet;
Perac ne andurot pa en deveus anduret
Gant ul lesyam cruel a g'emen a gafet.

Perac dious ar pec'het hag an occasion,
Na dec'het couls hag hy hag ober oræzon,
Pa zeo guir ar Verchez rac an æl a spontas,
Ha santez Eodet rac he breur a dec'has.

Perac, pa zoc'h fragil eve m'eo ur pôd pri,
N'o pezo qet a spont hag er mæs hag en ty?
Fac an occasion da goea er pec'het,
E fet rac'hol ouz cals a dud zo daonet.

E chom re dost d'an tan e teuer d'en em boazat,
 E chom dindan ar glao en em glebier timat,
 E vit en ocazion na guesset er pec'het,
 N'oun nemet tri remed : tec'het, tec'het, tec'het.

Tec'het prest.... ar maro bemdez a didosta,
 M'ar g'ell o surpréno pa sonjoc'h nebeuta;
 Cals eus a dud yaouanq oc'heus anavezet,
 Hag a greis o yec'het he deveus discaret.

Queuz o pezo neuze fot da veza heuliet
 An exempl a vertuz eus a Zantez Eodet:
 Commancit ta brêma da veva evelti,
 Hag e viot en ên curunet couls hag hi.

Pelloc'h eta. pa viot gant ho tud goal drêtet,
 Ous castel Tremasan troit prest ho speret,
 Gant he lesmam eno petra souffr Eodet,
 Sonjit ha grit evelti. gant Doue viot paet.

Ar vers-ma zo dediet da yaouanqis Leon,
 P'en hini, mar qeront, e cavint ar façon
 Da bratica ar vertuz caret. Doue a galon,
 Dre exempl ar Zantez bevet en o c'hanton.

Itron Santez Eodet, bezit avocadez
 Da yaouanqis Leon, heuilla rint ho puez;
 Oll guella ma illint en amzer da zonet,
 Chetu aman ar c'hontrat ganto oll goarantet:

Etrezomp, tud yaouanq, a escopti Leon,
 Pelloc'h e prometomp emeus a guir galon
 Imita ar vuez eus a Zantez Eodet.

E vit goude'r maro mont d'an ên d'e guelet.

F I N.

E Montroulez, e ti LÉDAN, e ru ar Vur.